

Sujed breved

E stumm ur pennad skridaozet, deskrivit dalc'hoù(enjeux) an tiriadoù tramor gall hag ar c'hempennoù savet a-benn respont dezhe.

Digoradur: Ober a ra an takadoù tramor **4%** eus ar boblañs gall ha **18%** eus gorread Frañs. An takadoù tramor a ziskouez tiriadoù pinvidik get a bep seurt **dibaroù(particularités) geografel ha sokial-ekonomikel** ar pezh a gas ur c'hempenn eus o ziriad digempouez stag doc'h diziangelderioù diorren don.

Dezverkoù arbennik pe dibaroù(particularités) geografel

- Pell eus ar vetropolenn gall hag an UE : 17 000 km Polinezia gall; 9300 La Reunion: koustoù-dezougen uhel-tre
- Inizi estroc'h Gwiana
- An endro diaesoc'h: live –mor é uhelaat get tommadur an hin; hin drovanel a gas kelc'hwidennoù; krenoù-douar
- Met tuoù mat evit an touristelezh
- Ur ZEE: danvezioù-mor divent get 8000 km a aodoù

Dezverkoù sokial-ekonomikel

- Dizingalderioù diorren ha pinvidigezh bras :PIB/ annezad edan 25% da 50% eus hini ar vetropolenn
- Feur dilabour: 2 wech brasoc'h, dale evit an avezadurioù hag akipamantoù (skoliata, yec'hed, dezougen, internet...)

Perak: pell eus ar vetropolenn + istor drevadennel

- Labour- douar ar plantadegoù a implije kalz a dud en enkadenn (sukr-korz, bananez), n'eus industri ebet tost, sujidigezh da enporzhiadurioù ar vetropolenn, tost eskemm ebet get ar broioù amezek
- Ur boblañs yaouank-tre get 3 million a dud get orinoù ha sevenadurioù liesseurt
- Memes ma d'eo an takadoù tramor , takadoù paouroc'h evit ar vetropolenn eo ar re-se ar re binvidikañ hag get ul live diorren uheloc'h evit o amezeien hag o kinnig lec'hioù surentez, ar pezh a gas redoù poblañs dilezennek é kreskiñ.

Tiriadoù tramor lakaet à-raok en doare dizingal

- An devezkoù-mañ geografel ha sokial-ekonomikel a gas diziangalderioù e-barzh aozadur an tiriadoù
- Bez'ez eus 2 du e-barzh an enezennoù trovanel, unan àr « aodoù en avel », kentoc'h gleb hag « an aodoù hep avel » gwarezet , a greizenn an dud hag an obererezhioù.
- Dargemmoù(contrastés) etre an arvorioù poblet ha kempennet touristel hag an diabarzh goullo
- Enebiezh ekonomikel ha sokial etre spasoù touristel a sach postadurioù evit degemer touristed etrebroadel ha spasoù buhez get poblañsoù indian(henvroidi) é veviñ a-drugarez d'an treuzkasoù sokial hag ivez sikourioù kaset get an UE (dre ma eo an tramor « régions ultra-périphériques » eus an UE ez eus an FSE(fond social européen).

Klozadur: n'eo ket bet kavet en takadoù tramor ur patrom evit diorren an takadoù-se hag e c'houzañv meurt a wech ar poblañsoù é c'houlenn muioc'h a bolitikerezh publik ha derc'hel get ar servijoù publik.